

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù – Gavotenn Goueled Leon

Ur gemenerez yaouank

Ur gemenerez yaouank, eus a goueled Leon
Pa'n devez graet rochedoù, rochedoù deus ar c'hiz
Dantelez war o daouarn, ken ledan ha tri biz
Ha pa'n doa graet anezho, na d'ar baraon yaouank
D'o c'has d'ar gêr eo aet, na pa oa deuet an noz
War an hent-bras p'edo vonet, hi rankontr daou lakez
Hi a rankontr daou lakez, hag ur palafraniezh
Hag hi 'c'houlenn 'ganto, an Aotrou 'zo 'n e gambr
O ya vat sur emezo, an Aotrou 'zo 'n e gambr
Da zigor an nor deoc'h-c'hwi, abalamour ma neuz c'hoant
Gant an nor p'eo erruet, tri daol he deus skoet
Piv a sko war va dorioù, d'ar poent-mañ diouzh an noz
Aotrou ho kemenerez, gant ho rochedoù kloz
Digorit an nor dezhi, evit ma teuy em c'hamb
Ma ficho din va gwele, ha skubo din va c'hamb
Roit dezhi da zebriñ, da zebriñ, da evañ
Roit dezhi da evañ, gant va gwerenn gristal
P'he doa debret hag evet, hag ur pennad kaozet
Ha eñ 'c'houlenn diganti, c'hwi aotrefe resev
Aour ivez hag arc'hant, c'hwi aotrefe resev
Hag ivez kousket un nozvezh, gant ar baron yaouank
A-benn antronoz vintin, pa ziskennas en traoñ
'oa karget dezhi he godelloù, a fiez hag a graoñ
Ma karje Marivonig, bezañ chomet er gêr gant he mamm
A-benn antronoz vintin, e vije bet divlam.